

486

Menec'h an enez glas

(40 recto)
col. de gauche

Me a mra bet eur choarek vad,
Lac'het e bet gant an Abbat-Abad.

Lac'het eo bet, a gwallet,
Gant manach ar gouent darnmet.

E man diu-man, war er bili,
Er goad o redek deus he fri.

E man diu-man war er bizin
He c'horf paour glas evel glizin

E man diu-man, he bleo melen
Mestek gant fang en dro d'he fenn

En man diu-man en he gourve
Sellet outi zo eur drue

O va Doue! a quir a ve,
A renfe pell er sort tud ze!

Archeskop Dol a levere,
En he gatedral en de se:

— War eur garek, en enez glas,
Zo 'r manati, Kreis er mor bras.

Kreis er mor bras zo eur gouent,
Savet goeac'h all gant er Sent.

(40 verso)
col. de gauche

Med er venac'h a zo enou
Na studiont Ken ho levrou.

Texte breton dans la colonne de gauche; trad. franç. dans la colonne de droite.
Ces fol^s 40 r^e et v^o et 41 recto sont écrits par Penguern.

ho zorfjeou pa n'ho chlewan,
A lak va chalon da spontan!

Mallos d'er venac'h zo er vro,
Vel er bleizj bars er c'hoajo!

Mallos war n'he, mallos an dud,
Mallos an env, all loened mud!

D'ar venec'h zo en enez glas,
Mallos ter goech, a mallos c'hoas!

Mab er Roue a levere,
War dor he boles en de se:

— Mar ge me zo mest er vro-man,
A lerer Breiz a-nean,

Me a zisko d'er vinic'hi,
Lezel en peuc'h va sujidi.

D'er venac'h du, d'er venac'h gwen,
Lezel en peuc'h va gwirvijen!

Me a savo eun arme vras,
Wit distrujan an enez-glas.

hag er venac'h a vo en-hi,
ma na vo espernet hini.

Er manac'h bras a levere
War lein ar skeul pi'arrie:

— Mui a verc'het a meus gwallet,
Wit zo aman euz ma selllet.

Mui a sakrilej e meus groet,
Wit zo neuden bars em rochet.

A c'hoas a c'houlan rog mervel
Ma Koes gwall war Breiz-izel!

7

[sicq au 41 verso.]

(41 recto)
et. de gauche.